

« ...Bemdez, bemnoz war ar mor blod,
Ma zad a oa 'vel e dadou
Stlejour rouedou. »

Kalloc'h.

BLEUN - BRUG

Niv. 87 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

GENVER 1956

An Aotrou Chaloni Favé

Vikel - Vras

Eur c'helou eo hag a ra enor ha poan d'ar Bleun-Brug.

Enor da genta, o soñjal ez eo bet dibabet, e aluzenner-meur da zougen eur garg ken uhel ha ken pouner ha m'eo karg eur Vikel-Vras.

Eur boan ive, pa zofij er c'holl a ra o weled o vont dioutañ eur beleg ken oberiant, bepred yaouank, leun a galon, a nerz hag a dan : eun nerz hag a zibrad, eun tan hag a zev.

O veza ne guita na Breiz nag an eskopti, ar Bleun-Brug a c'hell kredi e kendalc'ho d'en em vutaat euz ar garantez a zoug an ao. Fave da gement tra a zell ouz herez sakr hon Tadou.

Hon lennerien, o deus bet tro amañ, da weled niver ha talvoudegez ar pennadou savet diwar e blienn lemm. Pa veze berrentez warnomp ne veze morse deomp eun aner mont da skei war e zor, heñ person eur barrez vras ! Ra vo hirio meulet ha trugarekaet.

Ganet e Kleder e 1902, e kalon karent kristen, kalonek ha breizat eo en deus sunet ar pep gwella euz e berziou mad.

E Skaer, el lec'h ma voe kure, e reas kement a vad, ma voe anvet buan da gemer pen an Ykam en eskopti. Entana ' reas ar yaouankizou-se, a vije ét d'e heul n'eus forz da belêch. Gant karantez Doue ha karantez al labour-douar, e sanke dezo ive en o c'halon, karantez Vreiz.


Ar brezel her c'havas el lec'hioù dañjerusa.

Person e Lesneven e 1946. E Kastell e 1949.

Da varo an ao. Perrot, heñ eo a zo anvet gant an Ao. ' n Eskob Duparc da gemer ar plas ruz-gwad.

Bremañ eo Vikel-Vras ! Evit ar garg nevez-se fiziet ennañ, ra gavo amañ hor gwella gouro'hemennou.

B. B.



E Bleun-Brug Kastellin.

TAOLIT EVEZ MAT

Ma paet eo ganec'h ho koumanant 1955 ?

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).

Mar fell d'eoc'h beza ezel eus ar Bleun-Brug pe rei d'eomp skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Uhelloc'h : p. 1. — Yann-Herve Liberal : 2. — E Bro-Israel, ar c'hibboutzim, gant V. F. : 6. — Siboud, bioc'h Job Meskam : 12. — Menezioù-tan : 14. — Istor ar Bleun-Brug, gant L. L. : 15. — Keleier : 16. — Ar c'haz-koad : 17.

Bloavez mad !

uheloc'h



Echuet eo ar bloaz koz ha digoret ar bloaz nevez e-kreiz freuz ha lagenn ar politik.

Va Doue ! Nag edot pell diouz levenez, peoc'h ha sioulder Nedeleg !

Kompren a reer, en eur c'hiz, o welet penaos emañ, re alies, an dud, en defe Mab ar baradoz choazet eur c'hraou, evit dont war an douar ! Petra n'eus ket bet troadet ha livet a c'hevier evit paka êsoc'h a-se mcueziou ar geiz ?

« Grit arvezioù, parlantit flour

Hag e vec'h trubard evel an dour

Vi pe lapous a gavot war ar skourr. »

Komzou troet brao : promesaou kaer, klevet hor beus anexo gwalc'h hon diskouarn !

Ha koulskoude ped ha ped, ha ne welont ket uheloc'h eget beg o fri, a zo bet touellet ha dastumet !

Etouez ar pezh en deus laket trouz etre an dud, n'eus ket bet roet kalz a blas d'an traou a ro ar muia nec'hamant d'eomp amañ : Feiz ha Breiz.

N'eo ket gant traou an ene, na traou ar spered, eo ez oa prederiet an darn vrasa eus ar re a glaske krapat er c'hargou... siouaz !

Warnomp hon unan, eta, eo e rankimp konta evit kas hol labour war arak.

Ar bloaz nevez a zo roet d'eomp evit labourat, evit lakaat eur maen muioc'h da zavel ti hor bro, evit rei eun dremm kaeroc'h d'ar c'hornig douar m'omp bet ganet ennañ.

Ma lavarfeomp n'eus netra da ober, hor befe koumañset fall ar bloaz.

Kaer hor befe, koulskoude, en em zifreta ha kemeret poan, n'ez aimp ket da bell gant hol labour ma ne glaskomp ket labourat gant ar re all, bale dorn ha dorn ganto war hent ar furnez :

« An neb ne zent ket ouz ar stur

Ouz ar garreg a yelo sur ! »

En amzer ma klaske Judas Makabe dieubi hag adsevel e vro, e lennomp en Testamant koz, eur rummad Israëlitid, leun a youl vat en o c'halon, a c'hoanteas mont d'an emgann, evit ober o fenn o unan. Siouaz d'ezo, diskaret e voent, e berr amzer.

En eur ober ano anexo, ar Spered Santel en deus eur gomz rust : « N'oant ket emezañ, eus an dud a c'helle savetei Israel ».

Leun a draou diês a zo war hon hent. Muioc'h mui park ar wirionez a zo gwriet a zrez hag a spenn.

Evit Doue hag ar vro eo emamp o labourat.

Ar bloaz nevez ne dromplo ket ac'hanomp, ma poagnomp gant eur spered a feiz, a garantez hag a esperañs.

Ha setu perak, o c'houlenn diganeoc'h kemeret harp war an amzer dremenet, e karfen ive rei d'eoc'h da c'her-stur, evit ar bloaz-mañ, gér kelc'h Keltiek Kastellin : « UHELOC'H ».

Atao uheloc'h evel an alc'houeder a gan a-zioc'h da añchou hor parkeier.

L. B.

EUR STOURMER :

Yann-Hervé LIBERAL

ADSAYER AR BLEUN-BRUG



Selaou va breur ker,
Buan red an amzer,
Tremen ra pep tra,
Nerz, madou, yec'hed,
Yaouankiz ha gened,
Tremen ra pep tra.



AR c'hantig-se, unan eus hor re gaera dre ar c'homzou hag an ton a oa an hini a garie kalz hor breur **Yann-Hervé Liberal**.

Dre e garantez evit hor c'hantikou brezonek eo e voe skoulmet etrezomp liamm **Feiz ha Breiz**.

Miz C'houevrer 1947 : War ar gelaouen « Vent d'Ouest », va daou lagad a gouezas war eur pennad-skrid diwarbenn hor c'hantikou.

Eiz linenn am lakeas da dridal : An oberour a rae meuleudi an Aotrou Y.-V. Perrot, en eur gomz eus ar c'hantig **Beleg da viken**.

Va c'homprenit mat :

Embann bremañ pennadou meulus war Tad ar Bleun Brug n'eo ket ken souezus se, met d'ar poent-se an dra-se a oa estlammus awalc'h. Komz gant doujañs eus eun den hag a oa bet diskaret gant ar « Resistance » : eun « treitour » na petra ta ! Arabad kaout aon d'hel lavarout : evelse e sonje, e krede kalz tud, touellet kaer, siouaz !

Piou eta e oa an den-se, hag a sine H. Kastell hag a grede komz gant karantez eus an Aotrou Perrot ?

E oamp neuze o klask eun den nevez evit beza penn-rener ar Bleun-Brug, rak hor c'heneil **James Bouillé** a oa nevez maro, kouezet gwall glañv, goude beza bet toullbac'het, hep kaout netra da damall d'ezañ evel just !

Ha setu penaos **Yann-Hervé Liberal** a oa bet dibabet gant an nebeudig tud a jome en dro d'ar Bleun-Brug, evit kemer ar penn warlerc'h J. Bouillé.

Mall e oa ganeomp ivez, daoust d'an amzer ankenius, adsevel ar Bleun-Brug.

Maro an diazeour, maro ar penn-rener, dispartiet amañ hag a-hont ar sekretourien hag an aluzenner... Ar Bleun-Brug a oa aet da anaon na petra 'ta, a soñje darn.

Met daoust ma oa bet diskaret, lazet hon diazeour, e spered a jome beo hag e gomzou a voude bepred en hon diskouarn :

« Koumoul du a zo war feiz, koumoul du a zo war Breiz, gouest da lakaat eun den buan a-walc'h da fallgaloni, met n'eus koumoulenn, n'eus forz pegen du e vefe, hep eur vevenn arc'hant gant an heol a zo a-dreñv : Ar c'houmoul du a dremeno, ar feiz hag hor Breiz a skedo. »

Yann-Herve Liberal a oa entanet gant ar c'homzou-se, ha ne glaskas ket pemp troad d'ar maout. Raktal e kemeras stur ar Bleun-Brug, ha koulskoude ne oa ket hep gouzout an harz a gavje war e hent,

N'eus forz : **« Netra na den ne viro ouzin da gerzout war-du ar pal ! »** emeve. Hag ar pal da dizout a oa : Sevel eur c'hendalc'h, evit diskouez da Vreiz ne oa ket maro c'hoaz ar Bleun-Brug.

Met e pelec'h lakaat ar brug da advleunia ?

— War an dachenn elec'h m'emaon, eme Yann-Herve Liberal. E Kastell eta.

Eun dra gwall risklus e oa : Daoust hag e vefe kavet skoazell ; daoust ha ne vefe ket lakaet eur bern skoilhous war hon hent ? daoust ha ne vefe ket graet gaou ouzomp gant an teodou fall, o teurel disme-gañs war ar Bleun-Brug, warnomp ni ha kas d'an traoñ hol labour ?

Darn a lavaras ivez e oa c'hoaz re abred klask adsevel ar Bleun-Brug. Furoc'h e oa gortoz ken na vefe sioulêt da vat ar sperejou.

Met Yann-Herve Liberal a jomas bouzar d'ar brudou-se.

Tra souezus, hon rener nevez, n'en devoa ket anavezet an Aotrou Perrot, nemet dre e skridou, dre e oberou, ha dre e varo. Met Yann-Herve Liberal a oa eun den a feiz, heñvel ouz an diskibien-se ha n'o devoa ket anavezet ar C'hristi met hag a grede ennañ.

Dioustu eta, e veritas beza diskibl abostol Feiz ha Breiz, rak e feiz, e zoujañs, e garantez evit an Aotrou Perrot a oa bras ha setu ivez perak hep aon, e krogas e banniel ar Bleun-Brug, evit hel lakaat da strakal a nevez en oabl Breiz.

Ar bec'h ne vankas ket d'ezañ edoug ar bloaz 1948, ha peadra en devoa rener nevez ar Bleun-Brug da fallgaloni meur a vech. Met kerzout a rae, war-zu ar pal : **eun evel eun tenn**.

Ne ouiemp ket c'hoaz penaos e trofe an traoù gant Bleun-Brug Kastell. Hiniennou a soñje ne oamp ket fur, hag e vefe c'houitet an taol, ha re all a lavare : « Reuz a vo... reuz a vo ! »

Daoust ma ne oa ket tamm ebet e soñj Yann-Herve Liberal kila, re ziwezat e oa evit hen ober. Ha pebez fazi bras hon defe graet.

Ha setu ma voe gwelet dirak daoulagad sebezet Kastelliz — bet aonik a walc'h o rei o skoazell d'ar Bleun-Brug — Leoniz, Tregeriz, Kerneviz ha Bretoned divroet o tiredet a vil vern. Pa weljomp dindan an heol o skedi, eur mor a dud o c'helei ar blasenn evit Oferenn ar Bleun-Brug, Yann-Herve Liberal a lavaras din laouen : **« Trec'het hon eus. Barrek omp bremañ ! »**

Hag e gwirionez, barrek e oamp. Dre nerz kalon, dre feiz eun den, ar Bleun-Brug a oa savet eus a varo da veo.

Warlerc'h an trec'h-se, ar rener nevez a ziskouezas c'hoaz pebez danvez stourmer a oa ennan :

Maer Skrignag a glaskas, en eur gazetenn, rei da gredi e oa bet an Aotrou Perrot eun torfetour eun treitour.

Raktal, a-wel d'an holl — war ar c'hazetennoù — respont kalonek Yann-Herve Liberal a skoas evel eur birr tamallerien Tad ar Bleun-Brug (1).

Goude Trec'h Kastell, gant levez, gant fiziañs en amzer da zont, e oa oazet ha lakaet war-zao eil Kendalc'h ar Bleun-Brug goude ar brezel : Hini **Lokronan**. Siouaz, Yann-Herve Liberal, a gouezas klañv bras ha n'hellas ket, e galon rannet, kemeret perz, rei an dorn da sevel ar c'hendalc'h-se, a verkas muioc'h c'hoaz e oa adsavet ar Bleun-Brug.

Eur sakrifis bras e oa evit hor c'heneil karet. A Drugare Doue ar

bloaz warlerc'h, e welas laouen ha kennerzet, Bleun-Brug meur Sent Breiz, kaera hini a oa bet gwelet biskoaz.

Ha sklêr e oa edo Tadou ar Vro en o zouez Tad ar Bleun-Brug o kas en dro hor goueliou. Kalon Breiz a dride e mesk relegou hor sent koz, ha kolon Yann-Herve a c'helle tridal muioc'h c'hoaz eget ar re all...

Met ret e voe dezañ dilezel ar stourm. E yec'hed n'helle ket kemer ar gorre, ha gant e diegez niverus, e rankas kuitaat Breiz.

Gant kalz a nerz kalon hag a spered kristen e kemere e boan, hag eurus e veze atao o c'houzout penaos e troe an traou gant e vignoned a gendalc'h gant an ero.

E-gwir, eun dudi e oa kaout eur c'heneil evelse. Diou wech hepken en deus graet poan din : pa gouezas klañv, ha pa varvas.

Eiz deiz goude hor perc'herimaj e Koatkeo, e teuas d'eomp ar c'helou doanuis e oa bet skoet — d'e 43 vloaz — gant an Ankou, e Bro-Alzas.

Yann-Herve Liberal a oa anavezet ha doujet du-se, evit e feiz kristen birvidik hag e garantez ken birvidik all evit Breiz. Setu perak Aotrou 'n Eskob Strasbourg a fellas d'ezañ kas d'an ofereññ interamant, eur c'han-nad, en e ano, ha merc'hed bihan Kolmar a c'hoanteas kana, e brez-zoneg, kantig ar Baradoz... Bennoz Doue da Vro-Alzas.

Derc'hent Nedeleg, mignoned ar Bleun-Brug a gasas da vered Sant-Nic, e Bro-Gerne, sebeliet e plegou banniel Breiz, korf an hini a c'hel-lomp rei d'ezan añ ano mañ :

ADSAVER AR BLEUN-BRUG.

Hag evitañ e teu war hor muzellou ar c'hantig savet gant an Aotrou Y.-V. Perrot evit gwella mibien ha stourmerien Breiz :

**D'ar re a gouez e kreiz ar stourm
Astennit Doue mat ho tourn,
Ma vint e peoc'h
En Neñv ganeoc'h.**

Herry CAOUISSIN.

(1) Setu aman eul lodenn eus lizer Y.-H. Liberal kaset da Vaer Skrignag, hag embannet war ar c'helaouennou e miz Gwengolo 1948 :

...Vous écrivez, et c'est le point capital : « *Ce ne sont pas des criminels qui l'ont châtié (l'abbé Perrot), mais des justiciers, d'authentiques Résistants et Français, certitude de tous les Résistants.* »

« Ce que vous avancez là, vous êtes, naturellement, en mesure de le prouver. Votre esprit de justice, j'en suis convaincu, ne saurait admettre que l'on accablât un homme ni sa mémoire sur de vulgaires haines qui ne fussent pas étayées par des faits, des documents, des preuves.

« Si l'abbé Perrot était un traître, — si ses meurtriers étaient donc des justiciers, loin de s'en cacher ils doivent se glorifier de cet acte et celui-ci doit, en toute justice, leur apporter les honneurs les plus mérités. Tous ceux qui aiment la Vérité seront pressés de connaître enfin les noms de ces héros. Et que craindraient-ils d'une Justice et d'une Opinion qui ne peuvent, qui ne doivent que leur être reconnaissantes ?

« Qu'on nous dise leurs noms, qu'on nous apporte ces preuves, et, en ce qui nous concerne, navrés de l'ignominie du Père du Bleun-Brug, mais plus encore amoureux de la Vérité, nous serons les premiers à les saluer et à désavouer la personne de notre fondateur.

« Sinon, — en toute loyauté, — Monsieur le Maire, est-il possible à nous comme à vous-même, de donner à ces affirmations hâtives et haineuses d'autre nom que celui de calomnie ? »

Respont ebet !

Diverra eus buhez Yann-Hervé Liberal

Ganet eo bet an D^r Liberal e Sant-Nik, d'an 23 a viz Gwengolo 1912.

D'e eiz vloaz ez eas da heul e gerent da chom e-kichen Brazzaville.

Eus 1922 da 1931 e reas e studiou e skolaj Sant-Youen, e Kemper, ha goude e Roazon.

E genta bloavez a vedisinerez a reas e Brest ; goude ez eas da Vourdel e-pad tri bloaz.

Er bloaveziou 1938 ha 1939 her e'havomp e-giz medisin en eun ospital e Kemper.

Sammet ivez gant ar brezel, e raio e zever evit difenn ar vro, betek ma vo prizoniet e 1940.

E 1941 e teu d'ar gêr e-giz medisin.

E Plouigno eo e raio da genta wardro ar re glañv (1942-43), ha goude e Kastell-Paol eus 1944 da 1948.

Gwelet mat ha karet kenañ e oa gant e re glañv ha gant o familhou. Ne esperne nag e boan nag e amzer evit ober vad dezo.

E 1947 e kemeras perz e kendalc'h etre keltiek Dulen, en Iwerzon, hag em boe an eurvad d'ober gantañ ar veaj-se, ken plijus evidomp Bretoned. An Ao. Mocaer hag an D^r Kervran a oa ivez ganeomp.

Yann-Hervé Liberal a zimezas e 1936 gant an D^{lle} Marc'hadour eus Sant-Nik, a roas dezañ eur verc'h hag eur paotr : Mikaela ha Jakez.

Ar c'hlae'har en devoe da goll e bried kenta e 1942.

Eil dimezi a reas gant an Intañvez Mailloux-Chardonnet eus Brest, he doa dija eur verc'h : Marie-Louise.

Goude e eil dimezi e teuas pevar bugel all da greski an tiegez : Kristiana, Mari-Josef, Alan, ha Korantinaig. An diweza n'he deus nemet 4 bloaz.

E 1948, goude beza adsavet ar Bleun-Brug e kouezas klañv. Mont a reas d'ober wardro e yec'hed da Gastelbriant el lec'h ma reas anaoudegez gant an D^r Tricoire desket gantañ ar brezoneg ha deuet da veza gouziiek bras war hor yez. Ober a reas hemañ, war c'houlenn Yann Liberal, eur brezegenn war ar brezoneg, hag e brezoneg, e Bleun-Brug Kastell-Paol, 1950.

Gwellaet dezañ, mont a reas eur pennad da greñvaat da « Maisons-Laffitte », e Pariz, gant an D^r Kervran, e vignon.

Kavout a reas eur plas goude, e-giz medisin, en eur c'hlinik e « Trois-Epis » e kichen Kolmar.

Eno eo ez eo marvet, pell diouz e Vreiz, skoet a nevez gant ar c'hleñved didruez.

Den ne gompreno biken, pegen poanuis eo bet dezañ rankout chom keit all, ken pell diouz e vro. Klevout a rae dalc'hmat, Breiz ouz e c'hervel da zont da labourat eviti... ha n'helle ket.

Koulskoude eo distroet... met goude beza bet falc'het gant an Ankou.

Emañ bremañ e gorf paour, da c'hortoz ar varn, o tiskuiza, e bered sakr e barrez, e kichen e iliz koant, er vro-se, dirak ar mor-se hag a gare kement, ha tostig d'ar vamm-goz, Santez Anna ar Palud.

Pedomp Doue evitañ, hag eomp, bep an amzer da skuilha war e vez, eur beradig dour benniget.

Evit hor sikour da sevel war e vez eur groaz keltiek, bezit ar vadelez da gas eur prof da : Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes. C.C.P. 1541.90 Nantes.

V. S.

E BRO ISRAËL

ar « c'hibboutzim » pe an atanchou labouret e boutin

Nevez bet oun o pardona war-béz Hor Zalver, e Jeruzalem, hag am befe eur bern traou da gonta da lennerien « Bleun-Brug ». An Douar Santel a zo lod anezañ e bro-Jardonia, Arabed enni evit ar pep brasa, dalc'het ganto d'o boaziou koz da veva : Lod all a zo e bro Israël, eur vro nevez war meur a dachenn. Eun doare 'zo, dreist-holl, divoaz en hor bro anvet « Kibboutz » (liester « Kibboutzim ») er yez hebreek ; an ano-ze a vez roet da geriadennou bihan e lec'h ma vez labouret atanchou bras e boutin. Karout a rafen konta d'eoec'h eun nebeut doareou diwar e fenn.



Treuzet eo ganeomp an harzou etre an diou vro ha setu-ni e bro Israël ne pell diouz Jeruzalem. Emaomp o vont da weled eur c'hibboutz. N'emaomp ket en eur vro binvidik, pell ac'hano ! A bep tu d'an hent bras n'eus nemet frankizennou sec'h korn ; gwir eo emamp e miz Eost ha ne vez er vro berad glao ebet etre miz C'houevrer ha miz Du. Frankizennou keit ha m'hell an daoulagad tizout met n'int ket kompezennou avat ! nemet aridennadou torgennou, run ha stankenn a bep eil, sao ha dinaou gant an hent hep ehan. Eun dra bennak a zo bet hadet koulskoude — ha diwanet stank — ya, eur gwiskad brao a vein a bep ment, laeret an douar-stuz diwar o zro gant ar glaoeier hag an doureier ha chomet evelse da c'henaouegi.

En tu dehou d'an hent, war beg ar run uhela, tro-war-dro, e welomp eun doare keriadennig. Aze emañ ar c'hibboutz hon eus divizet gweladenni. Moarvat ez eus bet kaset kelou en araok rak unan eus gwazed ar c'hibboutz a zo ouz hor gortoz, ar « sekretour » an hini eo.

— « Galleg a ouzoc'h ? » Ar bras eus ar Yuzevien nevez distroet da vro o zud koz a zeu eus broiou ar reter ha kreiz Europa hag a gomz kentoc'h an Alamaneg pe ar Rusianeg.

— « Ya, mat tre ! savet oun bet e Paris ha n'eus c'hoaz nemet pevar bloaz abaoe m'oun deuet da Israël. Lavaret a rin d'eoec'h dre vras doare hor buhez amañ ha goudeze e reoc'h ouzin ar goulennou a blijjo ganeoc'h. »

Deskadurez ar « baccalauréat » en deus hag ar brezel eo en deus miret outañ da gendere'hel gant e studi. Abréd eo bet aet en eur strollad brezel kuz a glaske afer ouz an Alamaned astennet ganto o domani war douar Bro-Frañs. An darn-vuia eus ar wazed a zo amañ, fransizien holl pe dost, o deus an hevellep istor. Brao kenañ e teu e gentel gant ar sekretour, moarvat en devez tro alies da zibuna e gudenn. Respont fréz a reas d'an holl goulennou, gwidreüs awalc'h awechoñ, hep klask gwech ebet trei ar gont.

Setu amañ eun diverra eus ar pezh a zo bet displeget d'comp.



Ar c'hibboutz-mañ a zo anezañ abaoe miz Here 1946, araok ma oa dieub mat ar vro peogwir n'eo bet embannet stad dieub Israël nemet d'ar 14 a viz Mae 1948, pa guiteas ar Zaizon bro ar Palestin a oa dindan o gwarez abaoe ar brezel bras (1918). Mat e vefe bet dibuna istor gouenn ar Yuzevien hag is'or dazore'hidigez ha dieubidigez broad Israël met re a amzer a yafe ganeomp.

Eur gerig nemetken. Al Lord Balfour en anô gouarnamant Londrez en doa prometet d'an 2 a viz Du 1917, lezel ar Yuzevien strewet dre ar bed da zevel er Palestin evel eur mamm-vro nevez, d'ezo eta da zont di da ober o annez ha da veva. Petra a oa d'ar mare-se er Palestin, marteze 60.000 Yuzeo elec'h bre-mañ ez eus 1.502.000 anezo war an 1.692.000 a dud a zo er vro. Ne jom mui nemet 120.000 muzulman pe wardro, 40.000 Kristen, 15.000 Druz. Marteze ez eus tost da eur milion a Arabed tec'het kuit ha repuget er broiou tosta, e Jordania dreist-holl, o c'hortoz kaout tro da zont d'ar gêr.

Ar pezh 'zo zur eo e ranke ar Yuzevien, da genta, difenn o lod a enep an Arabed, setu perak o deus graet o annez war uhelennou ès da zifenn.

N'oa ket awalc'h en em zifenn. Ret e voe d'ezo ivez pourvei d'o ezommou. Ouspenn, o zoñj a oar ober eus ar vro kaset da baour dre leziregez an Arabed eur vro binvidik evit gellout rei repu d'an niver bras a Yuzevien gwasket hag heskinet e meur a vro. Penaos en em vataat eus ar frankizennou-meinek-se pe eus gwerniou brein chomet da zellet ouz an heol hep tañva. Blaz ha gloaz ar zouc'h abaoe daou vil bloaz lod anezo. Ezomm a oa da gaout binviajou labour a bep seurt, ludeier da vaga an douar, labourerien kalonek ha diviz evit diveina, doura ha dizoura, arc'hant hag amzer ivez evit gortoz, epad meur a vloavez, ma teufe ar gounidou da veza trec'h d'ar mizou. Gwella tra a oa da ober oa kemeret douarou bras hag o labourat e boutin gant tud ha n'o defe gopr ebet nemet ar pezh 'zo ret : bod, boued ha dilhad ; ouspenn kalz a zeue eus bro Rusia ha kredennou Karl Marx war ar voutinerez a oa o re. Emglevioù a berz stad a brenas an douar digant an Arabed, emglevioù all a roe war dermen mekanikou hag arc'hant evit ar bloavezioù kenta. An douarou n'oant ket da veza roet a leve da zén. Chom a raint leve ar c'houarnamant ha feurmet evit 99 vloaz evit eur priz-feurm diste kenañ.



Al labour-douar er c'hibboutz.

Amañ an ti-annez a zo war beg an dorgenn, ar pourpri, kreier ha kement 'zo, 500 metr bennak pelloc'h, kuit da veza re dost d'an anevaled. 520 dervez arad a zo stag ouz ar c'hibboutz, 20 dervez arat difraostet brao harp ouz ar gêr, 500 dervez arat all, 30 kilometr ac'hano, 50 anezo douret mat dija. Amañ eo an dour an abadenen vras. An douar diveinet ha skrabet, ma vez peadra d'e zoura, elec'h beza gouelec'h a dro da liorz gant a bep seurt a drevadou. Douarou bras a welimp amañ hag about hag a vez mekanikou glaoia o trei warno hep ehan. A hed an hent hag a-dreuz ar mêzioù korzennoù a red war an douar evit kas an dour.

Paotred ar c'hibboutz-mañ a zo en em roet dreist-holl d'ar frouez : pechez, kerez, avalou-orañjez — war an drevadou-ze eo troet kalz kibboutzim kibbouts — banan, avalou-sitron, pastek... Savet e vez ivez poñsined ha yér a villierou hervez an doareou-nevesa d'o zevel. Ouspenn, 40 bioc'h léz 30 onner. Diouz ma lavar d'comp ar sekretour e vez wardro 600 litrad laez bemdez, 15 litrad dre benn, an eil dre egile, lod saout a ro betek 25 litrad, 30 litrad a vez dalc'het evit an ti, ar peur-rest a vez roet d'eun emgleo evit beza gwerzet. Amañ ivez, o veza ma 'z eus kalz fransizien ez eur en em roet da ober kabellou-touseg ; n'eus kibbouts all ebet moarvat oc'h ober kement-all.

Paourig eo c'hoaz ar c'hibboutz, kalz dle a zo warnañ, fiziañs a zo avat e vo gelllet en em zevel nebeut ha nebeut.

Kibboutsim all a welimp kalz pinvidikec'h dreist-holl er Galile, er c'hompezennoù o deus kemeret plas ar gwerniou hag hed-a-hed ar ster Jourdin. Gwelloc'h eo an douar hag èsoc'h da zoura. A hed ar ster ez eus ivez kibboutsim hag o deus lennoù da zevl pesked ; stank eo al lennoù-ze. Eur c'hibbouts all a zo d'ezañ ar bagou pesketêrez a ya war mor Jenezared ; e tu ar reter emañ, resevet mat omp bet eno, evel ma vezer e pep kibbouts ha roet d'comp peadra

da eva ha sardined eus ar mor, frittet war ar billig. Lod all o deus labouradegou da ober simant a ro d'ezo ivez eun tammig arc'hant brao da askouezi.

Buhez an dud.

Eur c'hant bennak a dud a zo amañ, yaouank int evel e pep kibboutz, 20 koublad priedou, 30 a vugale d'ezo, en tu-mañ da 11 vloaz. N'eo ket stank ar c'hibboutzim hag o defe ken nebeut a dud ; ac'hano e teu moarvat e baourentez ; re all a zo gant 1.000 a dud, betek 1.500 ha 1.700 zoken.

Pep koublad priedou en deus e gambr e-unan ; an dud dizimez a zo a driou pe a bevarou e pep kambr. Nebeut a arrebeuri er c'hambreier, ezomm ebet ne zeus evel ma welimp. Ar vugale o deus o zi o-unan pe zoken o c'heriadenn o-unan er c'hibboutzim brasoc'h. Ar vugale a vez kaset d'o c'heriadenn — harp ouz tiez an dud vras, evel just — kerKent pa deuont war an douar pe dost. Ar vamm a hell evelse kregi endro gant he labour kentoc'h a ze. Merc'hed a vicher a zo karget da intent ouz ar vugale ha da veilha warno.

Abréd e vez graet skol d'ar vugale. Amañ ez eus re nebeut a vugale evit kaout eur skol ; met en em glevet ez eur gant an daou gibboutz tosta evit sevel eur skol voutin ; ar vugale a vez kaset bemdez d'ar skol.

Preder brasa ar Yuzevien eo ar vugale. Kenta ma vo poaniet evit sevel ha kempenn ha ficher eun dra bennak a zoare eo gant ti ha kêriadenn ar vugale ; goude-ze emañ tro ar pourpri, hag erfin e vo savet tier sasunoc'h evit an dud en oad. Met ar vugale da genta !

Gwazed ha merc'hed a hell beza kaset da ober n'eus forz peseurt labour nemet koulskoude e vo roet d'ar merc'hed, kement ha ma vo gallet al labourou a zere ar muia outo : keginna ha distailha, diorren ar vugale ober wardro ar yer pe an anevaled all, intent ouz an dilhajou.

Unan bennak a rank beza o komandi hag o kas an traou endro ? Ya, peun-rener al labour eo. Bemdez diouz an noz, e vo lavaret gantañ da bep hini ar pez en devezo da ober antronoz.

Al labour a stager gantañ da 6 eur diouz ar mintin, kousk ebet hag an dervez labour a vez echu a-benn peder eur hanter diouz ar pardaez. Goude-ze pep-hini a ra ar pez a gar. N'o deus soursi ebet da gaout gant ar priedou da farda peogwir ez eus eur gegin hag eur zal-dibri boutin. Ar zal-dibri a vo klasket abred ober anezi eul lec'h plijus, rak eno e tremen an dud kalz amzer, dreis-holl er bloaveziou kenta pa ne vez sal all ebet nag evit ar bodadennoù, nak evit ar c'hoferañsou na zoken evit ar bodadennoù relijiel (er c'hibboutzim a zo enno eun tamm feiz).

Da c'hortoz koan, ar priedou a hell kemeret ganto o bugale pe mont d'o gwelet. D'an dud a rebech d'ar c'hibboutzim dispartia ar vugale diouz o zud e vez respontet : « Daoust hag en ho proiou d'eoc'h-hu eo ker stank all an tadou hag ar mammou hag a hell gouestla div eur hanter bemdez eus o amzer d'o bugale hep kaout preder all ebet war o spered, na labour ebet war o divrec'h ? »

Lavaret em eus ez oa boutin ar gegin ; boutin eo adarre ar gont gant ar gwiska. Pep-hini e reseo an dilhad en deus ezomm, eun tammig evel er c'hazarn moarvat ha nebeut a blas evit al lore'h hag ar faltazi.

Bebet, gwisket ha lojet, tud ar c'hibboutzim ne resevont gwenneg ebet ; ar gounidou a ya er yalc'h voutin hag a zo peadra an holl. Bez ez eus lod kibboutzim hag e vez roet eun tammig gwerz-butun ar zizun da bep-hini. D'ar c'huzul-meur eo divizout war an dra-ze.

Er c'hibboutz m'emaomp en deus pep-hini gwir da gaout dek dervez frankiz ar bloaz, d'ezañ da vont da vale hervez e zoñj. Ouspenn en deus gwir d'eun dervez ehan ar zizun, da zadorn (sabbad ar Yuzevien pe ar zul ganto). Ar re a rank chom war o labour da zadorn — labourou a zo wardro eun tiegezh ha n'hellont ket gortoz — a dapo an derveziou-ze diwezatoc'h da veza staget ouz o dek

dervez frankiz. Da geñver o fennad ehan ar bloaz e vez roet eun tamm arc'hant da bep-hini. « Pegement ? » an dra-ze a vez divizet bep bloaz gant ar c'huzul-meur. — « Pegement er bloaz-mañ, lakomp ? » — « Amañ er bloaz-mañ ez eus bet divizet rei 60 lur israëliad da bep-hini, hag a hend-all 30 lur israëliad evit en em wiska ouspenn an dilhad a vez roet. Al lur israëliad a dalvez d'ar mare-mañ 250 lur eus hon arc'hant ni, setu a ra 15.000 ha 7.500.

Piou a zo o ren ar c'hibboutz ? N'eus mestr all ebet nemet ar c'huzul-meur, emañ emañ an holl dud en oad, 18 vloaz pe ouspenn. Bep bloaz e vez anvet gantañ, evit bloaz, ha dre voueziadeg — pep-hini en deus e vouez — an dud e karg ; tri anezo : rener al labouriou o kas an atant endro ; an teñzorier a zo d'ezañ ar prena hag ar gwerza hag ar c'hask amprestou er penn kenta ; hag ar sekretour, paotr ar paperiou hag an hini a veilh war ar peoc'h da lakaat da ren etre an holl. Bep sizun — aliesoc'h ma vez ret — e vez bodadeg gant ar c'huzul-meur goude koan hag e vez divizet war gement a zell ouz buhez ar c'hibboutz ; pep-hini a lavar e zoñj ha ma vez ret e vez votet.

E kêriadenn ar vugale — pa vezont niverus hag eun tammig oad d'ezo — ez eus ivez eur c'huzul-meur, d'ezo da zivizout kenetrezo war gement a zell ouz o c'hêriadenn.

Aes eo kredi ne vez ket kemeret n'eus fors piou dioustu er c'hibboutz. Unan hag en defe c'hoant dont ebarz a rank tremen da genta eur bloavezh penn da benn da vihana, evit kemeret stumm-spered an doare beva-se ; goude-ze e vo digemeret da vat ma vez ar c'huzul-meur a du. A hend-all pep-hini a hell mont kuit pa garo, n'eus den hag a rankfe chom, dre heg en eur c'hibboutz, met dre gaer.

Awechou e vo yaouankizou, paotred ha merc'hed, nevez digouezet er vro, e tro da zével eur c'hibboutz nevez. Tremen a raint, hanter kant pe dri-ugent anezo, lakomp eur pennad amzer en eur c'hibboutz hag a ya mat endro dija. Heulia a raint buhez ar c'hibboutz — mouez ebet n'o devo avat er c'huzul-meur — en em ober a raint ouz eur seurt doare beva hag ouz eur seurt stumm-spered, o c'huzul-meur d'ezo o-unan o devo ha pa gavo d'ezo e vezint prest e vo feurmet douar d'ezo ha roet binviajou war dermen evit mont war o c'hont o-unan, da zifraosta douarou nevez.

An holl labourerien douar n'emaint ket et c'hibboutzim. Bez ez eus ivez lod hag a labour o douar pep-hini gantañ e unan gant e zouar d'ezañ e leve evel hor bro. Bez ez eus kêriadennou ha ne deër ket enno keit gant ar voutinerez evel er c'hibboutzim ; amañ e labouront an douar e boutin met pep hini a zo en e di e-unan hag en deus e lod eus ar gounidou, pelloc'h pep-hini a labour e zouar e-unan, d'ezañ a leve pe diouz ferm nemet ec'h em glevont da labourat gant an hevelep mekanikou. A bep seurt emgleviou a zo evel-se. Ar c'hêriadennou laoskoc'h evel-se a zell ouz ar voutinerez a zo anvet « Moshava » (liester « Moshavot »). Gant ar re-ze e heller konta 450 pe evel-se a gêriadennou gant 230.000 a dud.

An holl gibboutzim n'o deus ket tre ar memes menozioù, lakomp politikel, ruz int pe rusoc'h. Teir gevredigezh vras a zo anezo hervez ar strolladou politikel m'int stag outo, 75 kibboutz pe wardro e pep-hini. An hini ' emaoomp enni a zo eus ar gevredigezh a du gant Ben Gourion, rener ar vro er mare-mañ. Amañ n'eus ano ebet eus a Zoue. Hag eur c'hristen neuze, daoust ha dont a hell d'ar c'hibboutz ? Ya, evel just, ar relijion a zo eun dra, ar c'hibboutz ha buhez ar c'hibboutz a zo eun dra-all. Eur c'hristen a hellfe mont da Jeruzalem da welet an tad Stiassny, eur beleg katolik, Yuzeo a ouenn.

Koulskoude ez eus ivez eur pemzek kibboutz bennak hag a zo relijiel, a vez desket ha miret enno ar c'hredennou hag al lidou eus ar relijion Yuzeo, bez o deus eur « sinagog (eun iliz) hag eur « rabbin » (doare beleg Yuzeo). Nebeut eo koulskoude : 15 Kibboutz gant eun tamm relijion war eun 250 pe evel-se a vefe er vro !

Hag e vo, dre ar vro a-bez miret ar « sabbad », hag e vo debret boued « Kosher » fardet hervez lezenn Voïzéz ; epad ar zizun zantel ne vo kavet da brena nemet bara hep goell, ha ne vez graet an dimeziou nemet gant ar rabbin... met en dra-mañ a zo eun abadenn all ; lidou diavéz ha netra kén — re all a zo c'hoaz — a zervij evit kenstrolla ar Yuzevien hirio evel m'o deus graet, a hed ar c'hantvejou, epad m'edo ar Yuzevien strewet dre holl.

Wardro an diorrén spered ha kalon.

Kalz eus tud ar c'hibboutez a zo tud desket brao, desket bras awechou. E-serr labourat an douar ha rei evel-se evel eur yaouankiz nevez d'ar ouenn e fell d'ar Yuzevien beza tud digor a spered ha desket. Preder bras a gemeront gant kement-se. Ar vugale a vez eta kaset d'ar skoliou bihan ha goudeze d'ar skoliou brasoc'h. Dre en em glevet etre meur a gibboutez o deus gelllet sevel ar skoliou brasoc'h-se, rak ar mizou skolia ar vugale a zo war gont pep kibboutez ; war a gredan beza intentet, an holl vugale a ya d'ar skol betek an oad a 18 vloaz. Ar vugale speredeka zokén a vo kaset uheloc'h c'hoaz, betek ar skol veur hebreek e Jeruzalem, ma vez divizet kement-se gant kuzul-meur ar c'hibboutez.

E pep kibboutez ez eus eul levraoueg gant levriou ha kazelennoù da lenn, levriou skrivet en hebreeg ha levriou skrivet er yezou all.

Bez ez eus ivez eur sinema. Filmou a heller da fermi evit nebeut a dra, pemp lur eus arc'hant ar vro, da lavaret eo 1250 lur dre hini.

An hend all e vez kaozeadennoù graet alies, war a bep seurt traou, pe gant tud eus ar c'hibboutez end-eeñ pe re all deuet eus Jeruzalem pe Haïffa.

Gant ar yez e kemerer kalz poan ; gant an holl e rank beza desket ; an darn vuia eus ar re a zeu eus ar broioù all n'int ket gwall varrek war an hebreeg hag e vez graet skol d'ezo. Buan awalc'h e teskont ar pezh retà. Ar Fransizien n'int ket bet kontet biskoaz gwall ampart war an deski yezou. Amañ, eme d'eomp ar sekretour, an holl a zo gouest d'en em denna gant ar yez hebreek evit o buhez pemdeziek hag o darempredou ; awalc'h eo gouzout 500 pe 600 gér. An hanter eus an dud a oar lenn ha skriva, unan war bevar a ana-vez mat awalc'h an hebreeg lennegel evit selaou kaozeadennoù en T.S.F. hag evit lenn levriou, lakomp eul levr ar miz emezañ. E bodadennoù ar c'huzul ne vez komzet nemet hebreeg ; a hend-all awechou, pa vezer etre kamaraded deuet eus an hevelep bro, e vez komzet yez ar vro-ze, amañ ar galleg, Ar vugale eo an hebreeg o yez kenta ; aes eo hen deski d'ezo peogwir e vezont peurliesha dispartì diouz o zud, ha goude ma ne ouefe ket o zud mat awalc'h an hebreeg. Gant o bugale eo e teu ar gerent da zeski buan ar pezh retà.

Kudenn ar yez hebreeg hag istor he dazorc'hidigez a zo bet hirroc'h eget na vez lavaret awechou. N'hellomp ket chom da astenni ar gont-ze hirio.

Evit ar galon avat hag evit an ene ez oun nec'hetoc'h. 80.000 dén hennak a zo er c'hibboutez, setu aze dija eul lodenn vras eus an dud diwar ar maez savet dizoue. Ha goude ma vefe er c'hibboutez dizoue-ze hiniennou a dud pe hiniennou a familhou hag o defe c'hoant chom fidel d'o chredennou relijiel nag a hoan o defe ouz hen ober p'eo ken striz-ze ar gumuniez kenetrezo ! N'ouzon ket penaos emañ kont gant ar moshavot met ma vefe an hevelep doare, setu 230.000 a dud ! Unan war bemp pe war c'houec'h eus tud ar vro, evel lased gant eur roued en eun doare beva dizoue, diès kenañ d'ezo en em denna anezañ. Lenn a raen en derveziou-mañ n'eus, e Bro Israël, nemet 15 dre gant eus ar Yuzevien hag a gredfe d'o relijion. N'emaint ket a du gant renerien an U.R.S.S. re o deus bet da ziwaska eus o ferz, met an hevelep mehoziou danvezennek a zo ouz o ren pe dost.

Ar vertuz a c'hlanded a vez taolet nebeut a evez outi ; koulz etouez ar vugale evel etouez an dud en oad. Ar vugale a vez savet mesk ha mesk, pao-tred ha merc'hed, betek an oad a driwec'h vloaz, a gav d'in, hag an dimeziou a zo és da freuza. Gwiskamant ar merc'hed n'eo ket gwall vódest hervez hon doare-ni d'o barn hag an dra-ze ivez a zisplij kenañ d'an Arabed ken striz war ar poent-se.

An amzer da zont.

Penaos e troio an traou ? Diaes eo her gouzout. Kudennou a bep seurt a zo da zifuilha. N'eo ket awalc'h moarvat d'eur vroad kaout trakterien, difraosta goueele'hioù, dizee'hi gwernioù, digas pinvidigez er vro ma vez mouget hec'h ene relijiel.

Lod a gred e vo aze labour ar rummadoù da zont ; pep tra d'e boent.

Eur beleg katolik, Yuzeo a ouenn, a reas d'eomp eur gaozeadenn diwarbenn Israël pa zigouezjomp er vro. Tridal a rae e galon o soñjal e oa distroet tud e ouenn d'o bro goz, d'ar vro bet prometet da Abraham ha da Voïzez, d'ar vro « o lec'h ma red al laez hag ar mel ». Dorn Doue eo en deus renet pep tra. Eun deiz da zont, emezañ, poblad Israël a adkavo e ene relijiel. Daoust ha soñjet ho peus, emezañ, e gwelidigez Ezechiel ? Dirazañ war eur gompezenn « Keij-meij eskern astennet ». War urz an Aotrou, Ezechiel a ziugan war an eskern-ze :

*« O burzud ! An eskern d'an eskern a dqstae ;
Mat en e lec'h, an eil d'egile 'n em joente
Warnezo kig, kroc'hen en eun taol voe kresket,
Leun e voent holl a vél... met spered n'o doe ket. »*

Evel-se ivez, eme ar beleg, al labour kenta a voe da ober, a voe tolpa ar Yuzevien, ober anezo eur vroad.

Gwelidigez Ezechiel n'eo ket echu, istor broad Israël kennebeut.

War urz an Aotrou, Ezechiel a c'houlenn digant ar Spered dont, c'houeza ra war an eskern divuhez.

*« Ar spered a zizoc'has enno, ha buhezek
Nerz en o izili, en o gwazied gwad
Setu ar c'helanou (1) en em lakaet war droad :
.....
« Me da lako, ma fobl, er miz eus ar garnel,
Ha da zigas a ran war da zouar, ha neuze,
C'houi ouezo holl penaos an Aotrou Meur, Me e.
Me ray d'eoc'h Spered, ha beva a rafed,
War zouar ho kentadou, c'houi a hello kousket.
Velse, en eur weled ober va madelez,
C'houi a laro : Gwir e, an Aotrou eo Henez. » (2)*

Labour tolpa (3) ar Yuzevien a ya mat war araok ; hepdale e welimp eil lodenn ar burzud, ar spered o c'houeza war ar poblad evit rei d'ezañ eun ene. Fiziañs hon eus zokén ez aint pelloc'h eget o zadou, chomet a zav war gostez an hent e-keit ma rede istor mab-dén, roet e vezo d'ezo da anaout sklér petra oa kefridi ar hobl dibabet gant Doue en amzer Abraham, Izaag ha Jakob ; digeri hent d'ar Zalver n'eus nemetañ, Hor Zalver Jezuz-Krist.

Evel-se e komzas ar beleg, en e zaoulagad du entanet, feiz kreñv profeted goz Israël. Ra blijo gant Doue digas da wir e gomzou.

V. F.

(1) Ar c'helanou : ar c'horfou maro — (2) troet diwar Y.-P. Kalloc'h.
(3) Tolpa : boda.

saoud lambaol

Siboud, bioc'h Job Mezkam

(Kendalc'h)

(Ar vioc'h nevez a zeblante beza sounnet. Kas a rae hepken he fenn goustad ouz eun tud d'egile, o klask gwelet gwelloc'h pe gompren.)

Job en em lakeas da rei d'ezhi taoliou dorn war he fenn-adrenv, a glaskas he bonta !

Ar vioc'h goustad a vransugelle he fenn eus enn tu d'egile.

Ar zaout all o doa treuzet an dour hag a valee bremañ war ar vein hag ar bizin ! « Baz » a droas he fenn, eur pennad, a reas eur vleujadenn, a zavas he lost hag a gendalc'has gant he hent.

Job a zave droug ennañ. Klask a reas eur penn-baz. Ne gavas nemet eun tamm bizin kalet ha gantañ ec'h en em lakeas da skei war gein e vioc'h nevez !

An tamm bizin a dorras hag ar vioc'h goustad a vransugelle he fen dolok eus eun tu d'egile !

« Foutre, pennad gal ! Pebez bioc'h sot ! Mont a ri, pe ne di ?... »

Hag a daoliou boutou ec'h en em lakeas da rei d'ezhi eur zaead !

Neuze ! Neuze, ar vioc'h en em lakeas da youc'hal, n'eo ket evel eur vioc'h, met evel eur c'havrig, met kalz skiltrusoc'h !

Ne ehane mui !

Annaig Kópi — eur c'hrac'h koz eus ar vourc'h — a dremene he amzer o tastum koc'h kezeg ! Leun oa he zi, a-hont war hent an ti-kêr. Me a oa kamalad da Anna Vari, he merc'h vihan, hag a gare debri en he c'hichen melfed krogennek poazet hep glaou na keuneud !

Annaig Kópi eo a glevas da genta ar vioc'h rak ni a oa ganeomp re a freuz. « Ne glevit ket bugale ! eur c'havrig ! »

Eur c'havrig, ne oa ken nemet unan, e ti Emil, ha nag a vizer a raemp d'ezhi ! Nag a blijadur pa zouble he fenn evit dont d'hon tourtal en eur lavaret : Bê...e...é... !

« Eur c'havrig ! Eur c'havrig, er Porzig ! »

Eus a bep tu e tifourche ar vousetaj ! Annaig Kópi a ehanas da gaoc'h-kezeka ha gant he baz, en eur zaoulammikat a deuas war hol lero'h !

Er Porzig ni a jomas eur pennad sabatuët, digor frank hor genou, evit gwelet gwelloc'h.

Job Mezkam, e voutou gantañ en e zaouarn, e dog o redek war-du ar mor, ar glaourenn en e c'hinou, a blante, a blante, fuloret, taoliou gant ar vioc'h en eur garnachal :

« Bioc'h lor ! Bioc'h an diaoul ! Eur vez eo ! Ha laeron Plouvian ! Marc'hadourien daonet ! Paea ker a raint ! Paea ker a raint ! An archerien, an archerien... »

Bê... ê... ê... eme ar vioc'h, en eur vransugellat he fenn ken goustadik ha tra, eus eun tu d'egile !

Ni a dosteas ! « Ya, deuit, paotred, deuit da gempenn he feskennou d'ar vioc'h diot-mañ. — Kemerit mein ha plantit ganti, ar banezenn, al leustreugenn, al loudourenn a vioc'h. »

Nag a anoïou all, hag a sklabezfe ar paper, a oa roet d'ezhi.

Ar vugale, tud o vont d'ar pioka, merc'hed Porsal, o vont da glask garved, hag a-hont war an dorgenn, Annaig Kópi, he baz en ear, nag a dud a oa bremañ en em vodet !

Bioc'h Job Mezkam a droas he fenn, her savas uhel, a reas gantan eun dro en ear, evel eun alvokad araok ober eur brezegenn.

Ni, mein en hon daouarn a oa prest da zailha warni ! Met ar vein ne jomjent ket pell, en hon daouarn, dirak an traou burzudus, edomp o vont da welout.

Bioc'h Job Mezkam, goude beza sellet war he zro, en em lakeas a-grenn war he fuch, oc'h ober siboud, a zellas adarre, en dro d'ezhi. Job, e-unan, a jomas digor e c'hinou.

Neuze, evit diskouez oa bet savet mat, e soublas he fenn en tu-mañ, en tu all, hag en em lakeas da c'hoari buan ha tear gant he zreid araok, evel eur c'haz o skrabat e vourrou, evel Fistoulig, ki Jobig Fanchig, pa vez oc'h ober komedi.

Ni a zirollas da c'hoarzin, merc'hed Porsal a lezas da goueza o fodou bihan, hag ekleo o mouezioù ken kreñv a yeas, sur oun, betek tour tan Landeda !

Annaig Kópi, avât, a zaoulammis kuit en eur ober sin ar groaz.

Abenn kreisteiz, edo embannet e Lambaol, e Gwitalmeze, e Sant-Pabu edo en em gavet an diaoul er Porzig, e korf bioc'h nevez Job Mezkam.



Bioc'h Job Mezkam a gendalc'he ar pezh c'hoari gant jinkou a bep seurt. En eun taol-kont e youc'has evel eur c'hi, evel eur c'hilhog, met p'en em lakeas da c'hoarzin, evel eur c'hagn a vaouez eus ar C'hleger, Perig, va c'hamalad, oc'h en em rodella en treaz, kement a ebad en doa, a deuas da veza du pod, freuzet e gov gantañ o c'hoarzin. Ni a lopus war e gein evit lakaat an traou da vont en o flas.

A vec'h m'edo divorfitet, ma weljomp ar vioc'h oc'h en em lakaat d'ober patati, pemp pe c'houec'h gwech, betek m'en em gavas e kichen tog Job, a gemeras, hag a lakeas war he c'herniel.

Ne oa den ebet mui en e sav, an holl a dorte o c'hoarzin. Job a rae neuz ive, met ar c'houezenn a ruihe war e dal, e galon a rae lammou gant ar gounnar ruz a oa ennañ !

Epad ma klaskemp sec'ha hon daoulagad, ar vioc'h, sounn he lost, a zistagas eur mellad lamm, ha kaer hon oa karnachal « chea, chea » e teuas d'an daoulammou d'ar gêr.

Lod a lavar he doa laket tog Job war beg he lost, met me, n'ez in ket da lavarout gevier, nag ar pezh n'oun ket asur da veza gwelet, gant va daoulagad va-unan.

An tog — unan ledan, kologwenn, war e dro eul las du, n'am eus ket e welet mui da c'houde.

Pa glevas Jef Mezkam ar pezh a oa c'hoarvezet, pa welas war-dro al liorz, hed an deiz, kement a dud, eus a bep korn eus ar barrez, o tont da welet an aneval sebezus, sujet bremañ el liorz, harp en ti, m'hel laevar d'eoc'h e rae eur penn, gwasoc'h eget ma vije bet interamant he mamm gaer : « Eur reriad vez hon d'ezo abalamour d'it, panezenn a zo ac'hanout » a lavaras d'he hini koz, pa deuas d'ar gêr evit ar yod...

Job a zouble e beñ... An dud, dre ma z'ea, a rae goap anezañ. « Ha Siboud, da vioc'h nevez, Job » ? An ano-se a rede war an holl vuzellou. « Sinema zo bet en aod, diouz ma klevan, er beure mañ !!! » Job Mezkam a zave neuze e skoazioù, a bec'he etre e zent hag a yae pelloc'h, epad ma lavare Annaig Kópi er vourc'h : « Klaoustre, disul, ne vrallo ket kement e gleier eget araok ! »

Mab an Dig.

Kenstrivadeg vras Emgleo Breiz (F. C. B.)

40.000 lur a brizioù d'ar gwella labourioù :

1° Eur pezh-c'hoari en eun arvest ;

2° pe : eun danevell etre 20 hag 50 pajenn ;

3° pe : eur pezh barzoniezh etre 100 ha 300 gwerzenn.

Pep tra a ranko beza diembann, hag hep beza troet diwar yez all ebet.

Kas ar skridoù araok ar 15 a viz Mae da : Secrétariat F. C. B., Boîte Post. n° 17 Brest.

Menezioù - tan

War a gonter, e vefe war-dro 500 menez-tan dre ar Bed.

Menezioù-tan an *Eirop* a vez kavet dreist-holl war-dro ar *Mor-Kreizdouar*. Piou ne anavez ket ar *Vezuc*, en Itali. An *Etna*, er Sisi. Kavout a rerr c'hoaz ar *Stromboli*, ar *Vulkano*.

Menezioù-tan a gaver c'hoaz en *Island*. An hini ar muia anavezet eo ar *Menez-Hekla*, 1557 m. d'ezañ. Abaoe 1104 en deus strinket tan ugent kwech bennak. E 1945 e ruilhas an traou bero anezañ betek 15 km. dioutañ. E 1947 eo e strinkas tan evit ar wech diweza.



En *Azia* e kaver e-leiz a veneziou-tañ.

Er *C'hamtchoka* ez eus eun ugent menez-tan bennak. 4860 m. en deus an uhella anezo : ar menez *Klioutchenskaia*.

Bro-Japon n'he deus ket nebeutoc'h eget 50 menez-tan. Ar muia anavezet eo ar *Fuji-Yama*, eun dislonker tan euz ar c'henta.

En enezennou ar *Sond* eo emañ er *Béd-mañ*, ar muia menezioù-tan.



En *Amerik* ivez e kaver kalz menezioù-tan.

En *Alaska* ne c'houzer ket c'hoaz pet a zo, rak, atao, pa zeer da glask e kaver unan nevez bennak. Ar menez *Katmai*, eo, marteze an hini brasa 2250 m. d'ezañ gant eur siminal a 5 km. a ledander. 20 km³ a ludu en deus bet dislonket e 1912. N'eo ket souezus, neketa ! gant eur gorzailhenn ken digor-all. Koll emañ avât, gant ar menez *Aniakchak* hag en defe betek 10 km. digor.

Penn-da-benn d'ar *Pasifik* e-kreiz menezioù uhel-uhel, e kaver c'hoaz e-leiz a veneziou-tan.

Darn anezo, maro bremañ, a zo deuet o génou bras da veza lennou evel ar menez *Shasta* (4374 m.). Ar menez *Lassen* (3181 m.) a oar c'hoaz dislonka tan.

Er *Meksik* e kaver ar *Popocatepetl* (5400 m.). — Ar *Menez-Kolima* en deus bet dislonket tan e 1941. Eun all, ha n'oa roud ebet anezañ araok, a zo bet ganet, e-kreiz eur parkad mais d'an 20 a viz C'houevrer 1943 : ar *Parikutin*.

Er *Martinik* emañ ar *Menez-Moal* hag en deus bet distrujet kêr Sant-Per e 1902.

E *Bro-Equatour* ez eus tri vell menez-tan. Unan anezo, ar menez *Kotopaxi* (5943 m.) ne baouez ket da strinka tan. Egile, ar *Sangay* (5293 m.) eo ar gwas a menez-tan a zo er bed dre an distruj a ra en dro dezañ. An trede, ar *Chimborazo* (6310 m.) en deus savet, dre forz dislonka, eun douribell a 4000 m. en-dro d'e ziminal.

Er *Perou* e kaver ar *Menez-Misti*, a zav e c'henou 6000 m. bennak a-us kêr Arekipa. War a gonter, ez eo stanket dezañ bremañ e gorzailhenn gant eur stouf skorn kalet, ken m'eo bet mouget-mik.



Ma tiskennomp en *Oseania*, e kavomp adarre menezioù-tan : en *Nevez-Zeland* ez eus pemp, dreist-holl an *Tarawara*, a darzas e 1886 o lezel war e gostez eun toull digor a 15 km. : eur gwall darzadenn hag a reas trouz !



Echuomp gant an *Afrik*. Emañ n'eus ket kalz a veneziou-tan. Ar *Menez-Kameroun* eo an hini anezo ar muia entanet. Ar *C'hilimandjaro* (6015 m.) en deus an êr da veza maro-mat dindan eur gwiskad teo a erc'h hag a skorn.

Ha setu grêt ganeomp tro ar menezioù-tan ar muia anavezet, hirio, dre ar *Béd*.

- V. S.

ISTOR AR BLEUN - BRUG

Diazezour ar B. B. war hent karantez Breiz

Ha gouzout a rez, lenner, peur, penaos, perak eo bet kouezet war da spered had ar garantez e peus evit da vro ha savet dezañ gwrizioù e poull da galon ? Nec'het out lakaet, kazi sur, evit rei respont d'eur seurt goulenn. Eun netraig awechou, gwelet, klevet, lennet, eur gazetenn, eur gelaouenn, eul leor kavet pe brestet; eur ganaouenn, eur c'hantig, eur gouel, skouer eur mignon, eur gêr displijus marteze e keñver da vro pe da gênvroiz, piou ' oar ar penn-kaoz ?

Disheñvel an had, disheñvel ar sperejou, disheñvel ar c'halonou ; disheñvel eta doareou ar gwrizioù.

En amzer yaouankiz Jean-Marie (al lezhano-ze eo a veze roet dezañ) Perrot, n'eo ket eus e dud nag eus e amezeien e vije bet savet eun elfenn eus ar garantez vro. Labourerien douar e oant holl ha brezonegerien ha ne ouient netra, a gredan, eus istor Breiz. Er gêr, ar pedennou a veze e brezoneg, lennet e veze bemdez *Buhez ar Zent*, evel m'edo ar c'hiz, d'ar mare-ze, e peb tiege a Oueled-Leon. Bep miz e teue dezo « *Liziri Breuriez ar Feiz* », « *Kannad ar Galoun Zakr* » ha paperigou glaz abostolaj ar bedenn. N'oa ket stank an tiegeziou ma veze prenet, bep sizun, ar C'hourrier. Bep seurt leoriou a zevotion a veze kavet e pep ti war ar mêz. Meneg ebet, avât, en holl draou-ze, eus buhez Breiz gwechall hag en amzer o ren.



Ne glevas eta ar paotrig, er gêr, nemet brezoneg. Ger gallek ebet e iliz Treouergat ; e skol ar gomun ne veze ket difennet brezonekât ; e brezoneg zoken e veze desket eno ar c'hatekiz ; ha netra ken.

E Breiz, ne oa, oc'h ober war-dro istor ar vro hag ar brezoneg, nemet tud desket ha ne ouie ar bobl netra eus ar pezh a reent hag, evit gwir, n'oa ket chalet gant istor na yez ha ne dalvezent ket da wellât stad he buhez.

Ret e oa skolia ar vugale evit dezo gouzout lenn, skriva, kounta, deski galleg. Mistri-skol a oa hag a zifenne ouz ar vugale komz brezoneg er skol. Ar brezoneg, a gredent, a vire ouz ar skolidi da zeski galleg. Eun touloun da Jean-Marie, frêr e Gwengamp, a grede kement all. P'en em gavas e niz e skol ar frered, er gêr-ze, souezet e voe o klevet e contr o lavaret dezañ : « *Emañ eo difennet komz brezoneg. D'an neb er gra e vez roet eur vountounenn doull, anret ar vuoc'h. Bep tro ma vezo ar vuoc'h ganez, bep tro e vezo did eur binijenn da ober* ».

Pe soñjou a ziwanas e spered ar paotr diwar eur seurt urz ? Miret, d'ober eun dra ha ne zebtant ket beza na pec'hed na fazi nag ober droug da zen ebet, hervez santimant eun den, eur paotr dreist-holl hag a zo kizidik e spered, netra welloc'h d'e lakat da rebarbi. Re yaouank eo da gaout ar perak eus an difenn ha dre-ze eus ar binijenn. Re yaouank eta da gompren e oant disme-gañsus, evit karantez e vro. Met ne vez ket pell eur bugel o-weled an techou-fall a jach gantañ d'e heul ar simbol : an troiou-kamm etre kamaladed, ar gevier, ar flaterezh, ar facheri, an emgannou, an enebiez zoken ha displealded ar vistri awechou. Aze emañ an droug a ra ar simbol, e anaout mad a ran rag aliez em eus tañvet e binijennou. Seulvui neuze e vez difennet ober eun dra bennak seulvui er greer.

An tountoun frêr a zo bet koll er c'hoari-ze. Fiziout a rec e yafe e niz da frêr gantañ. Piou ' oar ma n'eo ket ar simbol bet penn-kaoz ma n'eo ket ét Jean-Marie da frêr ?



Gwir eo e teue gant e vakañsou da Vrendeger e Lok-Maria-Plouzane. E penn ar barrez edo person, abaoe ar 27 a viz Eost 1889 an aotrou Mengant, eur beleg a ijin hag a galon. Kerkent ha tronet, mision bras a oa bet, kempennet a

nevez 'oa bet an iliz, dreset kalvariou ar barrez, savet eun ti-skol. Kenta strolad potred yaouank savet e bro Leon evit displega peziou c'hoari a oa hini Lok-Maria. M'ho peus tro da zont da Lok-Maria e welot, en iliz ha war ar beziou, brezoneg forz pegement. War roudou an aotrou Mengant emao'h eno. Ha pet ha pet bugel eus ar barrez a zo bet hentehet gantañ da vont da veleg ? Jean-Marie Perrot a zo bet unan eus ar re-se.

Pa varvas an aotr. Mengant, e 1907, en aotr. Perrôt a skrivas kement-mañ e « *Feiz ha Breiz* » : Ma oa eur beleg mad, an dra-ze ne vire ket outañ da veza ivez eur breizad kalonek. N'oa ket, evel ma 'z eus kalz, eun divroad en e vro, nann, rag den ebet ne anaie gwelloc'h egetañ ar c'horn-douar m'oa ginidig anezañ.

E studiou war an Aotrou Mikeal Nobletz, war Lok-Maria hag ar parrezioù tro-war-dro o deus eun dalvoudegez vras... Kared a rae rei d'ar brezoneg ar plas a enor a dle kaout e Breiz. Plijout a rae dezañ gweled ha mont da weled ar c'hoariadegou brezonek diwanet evit ar wech kenta en e barrez hag unan eus an deizioù a reas muiad dudi d'e galon a Vreizad da ziweza, oa an deiz a dre-menais e Kergournadec'h evit Gouel ar Bleun-Brug.

« Eur beleg mad hag a lakeas kared ar beleg, eur Breizad kalonek hag a lakeas kared Breiz, setu e daou c'hér petra eo bet an Aotrou Mengant... »

Eur skouer kaer evit Jean-Marie hag eun digoll eus pinijennou ar c'hoz simbol skol Gwengamp.

L. Lok.

KELEIER

Misionou Bro-Japon.

Eur mignon, misioner e Bro-Japon a gas deomp ar c'heleier-mañ.

Bro-Japon n'eus enni nemet 212.000 katolik war 88 milion a dud.

Evit gouind d'ar feiz kristen, eur boblad tud ken niverus n'eus nemet 1283 beleg,

317 frer ha 3498 leanez, ar pezh a ra etre tout : 5.098.

Dont a ra ar re-mañ eur ar broioù-mañ : Japon : 2.709 — Kanada : 437 — U.S.A. : 330 — Almag'n : 308 — Italia : 289 — Frañs : 253 (plijus e vije deomp gouzout pet breizad a zo e-touez ar re-mañ) ? Spagn : 230 — Beljia : 109 — Iwerzon : 105 — Aostralia : 49 — Polonia : 41 — Suis : 32 — Mexik : 27 — Korea : 25 — Sina : 23 — Holland : 19 — Malt : 13 — Kolombia : 12 — Hongria : 12 — Brezil : 8 — Aotroch : 8 — Bro-Zaoz : 8 — Neo-Zeland : 8 — Arjantina : 7 — Philippin : 7 — Yougoslavia : 6 — Tchekia : 7 — Portugal : 5 — Luxembourg : 3 — Bro-Skos : 2 — Formos : 2 — Sued : 1 — Vatikan : 1 — Lithuani : 1 — Divro : 1.

An 317 frer a zo euz an Urziou-mañ : Maristanist : 74, er Japon abaoe 1887 (55 frer japonat a zo dija e-touez ar re-mañ) ; — Frered Sant-Yann-La Sal : 29 (gant 7 japonat) er Japon abaoe 1932. — Frered Sant-Viateur : 8 (abaoe 1948). — Maristad : 9 (abaoe 1951). — Frered a Bloermel : 12 (abaoe 1951). Ginidik eo an 12-mañ euz ar C'hanada.

Bro-Japon a gresk bep bloaz euz eur milion a dud. Warlene ez eus bet 1.212 badeziant.

Dre ar skol gristen eo e teuer ar muiad a-benn da c'hrounid Japoniz d'ar feiz kristen. Frered Ploermel a zo o sevel e Yokohama eur skol evit 1.200 pe 1.500 skoliad

Fr. ISIDOR.

Levriou nevez.

Pax evit an Anaon, embannet gant Menec'h Kerbeneat-Landevenneg. Eun nivereñ euz ar re gaera euz ar glaouenn Pax eo heñnañ. Ar skeudennou, gant Jos Doare, koulz hag ar skridou, gant Debidour, Stany Gauthier... a zo dreist. Netra gwelloc'h n'ez eus bet embannet war « ar maro » e Breiz. Koumanant bloaz : ordinal 250 lur. Shoazell : 500 lur. C.C.P. Rennes 1145-34. H. Gougay, Abbaye de Kerbeneat, Plouneventer (Fin.).

... « Les articles que nous présentons, ne sont pas les arguments d'une thèse. Ils sont le relevé objectif de la réalité : la Bretagne est chrétienne dans sa méditation chrétienne de la mort. Il est sûr, que cette méditation est une des manifestations les plus familières de sa religion, mais pour établir les âmes dans le sérieux, pour éduquer en elle le sens du sacré, non pour les tyranniser par des erreurs de primitifs ou des contes d'enfants... » (Pax, p. 2.)

« Laennec », gant Roger Kervran.

Resevel hon eus « **Laennec, Médecin breton** » gant Roger Kervran. Un volume 13x20 de 272 p. : 675 francs. Librairie Hachette, Paris.

Skrivet eo bet dija, meur a wech, buhez « Laennec ». Mel, skrivaniar ebet n'en deus gouezet diskotez ennañ ar Breizad, evel ma ra hor Mignon an D^r Kervran, breizad kalonek mar deus unan, is-rener an F.C.B. ha Bleun-Brug Pariz.

War bajenn genta al lev'r e lennomp ar c'hinnig-mañ, e brezoneg : « **D'am zud koz, a labour e douar e Lanhouarne** ». Kloza 'ra al leor gant al linennou-mañ, warno ivez liou ar vro :

...« **L'enterrement (de Laennec) eut lieu le 16 Août 1826... Derrière la charrette qui portait le cercueil, suivaient Mme Laennec, Marie-Anne Laennec... et tout le bon monde des champs, des grèves et du bourg : chapeaux ronds, bonnets larges, coiffes, longs cheveux et bragou-braz.**

« **Laennec fut enterré au nouveau cimetière de Ploaré, un cimetière de paysans-pêcheurs qui reçoit toutes les brises de la mer, entretenu et fleuri comme un jardin de retraité, un cimetière réjoui de chants de coqs et d'appels de cloches, visité la nuit par les reflets des phares... »**

Koulz hon eus he vije el leor nemet troidigez e'hallek liziri brezonek Laennec. Gouzout a reomp avat n'eo ket faot an oberour eo.

Lennit « Laennec », leor an D^r Kervran : buhez eur Breizad meur skrivet dudius gant ampartiz karantez ha gouiziegez.

Gant plijadur hon eus lennet eo bet spilhennet ar vetalenn a enor war beultrin an D^r Kervran. Setu eur vetalenn plaset mat. Evit an enor-se grêt d'ezañ, hag evit e lev'r kaer, ra gavo amañ hor gwella gourc'hemennou.

EUR GENSTRIVADeg TROIDIGez salmou

Ar pezh a c'houlennet :

1^o Eun droidigez rimet gant klotennou-dibenn o rima daou ha daou, pe gentoc'h c'hoaz kroaziet (da lavarout eo en eur poz, ar werzenn 3, ar werzenn 2 gant 4). Da vihana, evit ar gwerzennou berr, en eur poz 4 gwerzenn, e tle rima an eil gwerzenn gant ar bedrevet.

2^o En em harpa, pe war an droidigez latin nevez, pe war droidigez Bibl Jeruzalem (houmañ a ro gwelloc'h stumm evit troc'h ar pozioù). N'eo ket ret trei gér evit gér, met ret eo evelkent mirout nat ar ster, hep re astenn, pe re genna.

3^o Mirout lusk ar pozioù evel n'emaint peurliesha e stumm hebreeg ar salm, hervez an notennou hon eus merket izeloc'h evit pep salm. A-wechou a vo gwelloc'h pepella gwerzennou hiroc'h ha heiroc'h, lakaat da skouer a bep eil gwerzennou 10 sillabenn da vont gant gwerzennou 8 sillabenn, pe 12 sillabenn gant 9, hag all.

4^o Peza troet da vihana 5 salm eus ar rol kinniget amañ war lere'h. Muioc'h eget pemp a c'heller ober evel just : dale'het e vo kont eus empled al labour kaset evit diforc'ha kenstriverien a c'hellfe beza par a-hend-all.

5^o Setu amañ roll ar salmou kinniget (an nivereñnoù eo re ar Vulgata, pe an droidigez latin nevez) : 15 (poziou 2 werzenn) ; 16 (poziou 4 gwerzenn rimou kroaziet) ; 18 A (poziou 4 gwerzenn rimou kroaziet) ; 18 B (poziou 4 gwerzenn rimou kroaziet) ; 22 (poziou 4 gwerzenn) ; 23 (poziou 2 werzenn ha 3 gwerzenn goude ar gwerzad 7) ; 24 (poziou 2 werzenn) ; 33 (poziou 2 werzenn) ; 41-42 (poziou 4 gwerzenn) ; 47 (poziou 4 gwerzenn) ; 50 (poziou 4 gwerzenn) ; 53 (poziou 4 gwerzenn) ; 65, gwerzadon 1-8 hepken (poziou 2 werzenn) ; 79, gwerzadon 2-8 hepken (poziou 2 werzenn pe 4) ; 84 (poziou 2 werzenn) ; 85 (poziou 4 gwerzenn) ; 87 (poziou 4 gwerzenn) ; 90 (poziou 4 gwerzenn) ; 93 (poziou 3 gwerzenn) ; 94 (poziou 4 gwerzenn) ; 96 (poziou 4 gwerzenn) ; 97 (poziou 4 gwerzenn) ; 99 (poziou 3 gwerzenn) ; 109 (poziou 2 werzenn) ; 116 (poziou 2 werzenn pe 4) ; 117 ; 120 (poziou peder gwerzenn) ; 121 (poziou 4 gwerzenn) ; 122 ; 136 ; 137 (poziou 2 werzenn) ; 140 (poziou 4 gwerzenn) ; 144 (poziou 4 gwerzenn).

Lec'h n'hon eus notet netra e chom frankiz d'ober ar pozioù evit ar gwe'la.

Evel just, eur wech kemeret en eur salm eur stumm-rima, n'heller ken kemma evit ar salm-se.

6^o Al labourioù a ranko beza kaset da : ao. beleg Loelz ar Floc'h, 5, rue des Capucins, Saint-Brieuc, araka ar 1-a a viz Mezeven.

Setu amañ ar prizioù kinniget dre vadelez an Itron Sant Pêr : Priz kenta : 5.000 lur ; eil priz : 2.000 lur ; trede priz : 1.000 lur. Hervez niver al labourioù resevet e c'hellfe beza astennet roll ar prizioù.

Er miz a zeu e vo kavet amañ : **Al labouradegou e Breiz** : priz kenta ar skriva B. B. Landi, gant an Ao. Bourdelles. — Roll hor madoberourien... ha barzoneg **Eostig an Argoad**.


Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires. QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697



Ar c'haz-koad

kan skouted BLEIMOR BODILIZ

Ton : gant R. ABJEAN.



Me gar. fe ha za kaz. koad Tra la la la le.
no ken mi. bin ker skanv a droad Tra la la la le no.

1. Me' garfe beza kaz-koad
La, la, la leno !
Ken **mibin**, ken skañv a droad.
2. Beva sioul er **glasteriou**
C'hoari e-kreiz ar **bleunioù**.
3. Fringal e begou ar gwez,
Ober lammou' zo eur **souez**.
4. Krimpa dillo an **drojenn**,
Prim evel eul **luc'hedenn**.
5. Korolli war ar skourrou
C'hoari toull-kuz en déliou.
6. **Lammiga** er brugeier,
Al lost **bodek** soun en êr.
7. Morgouska war ar **c'hinvi**
'Skeud ar balan melen-vi.
8. Disklavi' traoñ ar radenn,
Eh eur floura ar **vourrenn**.
9. Beza bepred war evez,
D'en em **flipa** pa vez c'houez.
10. Redek koad e-**strolladou**
'N'eur vransellat er brankou.
11. Krignat, **diwiska moc'h-pin**
Evit chaokat an had fin.
12. Bernia **méz** ha kraoñ-kelvez
'Vit o c'haout d'an amzer c'houez.
13. 'N'eur lammat leun a vuhe
Kaz-koad a **veul** e ZOUE.

Moualc'h ar Sklerder.

(Here 1955.)